

Tri martolod

Tri martolod yaouank tra la la la digatra
 Tri martolod yaouank o vonet da veajiñ
 O vonet da veajiñ ge, o vonet da veajiñ

Gant avel bet kaset tra la la la digatra
 Gant avel bet kaset betek an Douar-Nevez
 betek an Douar-Nevez ge, betek an Douar-Nevez

E kichen Meilh-ar-Wern tra la la la digatra
 E kichen Meilh-ar-Wern o deus mouilhet o eoriou
 o deus mouilhet o eoriou ge, o deus mouilhet o eoriou

Hag e-barzh ar veilh-se tra la la la digatra
 Hag e-barzh ar veilh-se e oa ur servijourez
 e oa ur servijourez ge, e oa ur servijourez

Hag e c'houlenn ganin tra la la la digatra
 Hag e c'houlenn ganin pelec'h hor boa konesañs
 pelec'h hor boa konesañs ge, pelec'h hor boa konesañs

E Naoned er marc'had tra la la la digatra
 E Naoned er marc'had hor boa choazet ur walenn
 hor boa choazet ur walenn ge, hor boa choazet ur walenn

Geriadur : vocabulaire	
An : le, la Avel f ioù: vent Tri: trois Beajiñ : voyager Betek : jusqu'à Choaz : choisir Douar m où, eier: terre E barzh : à l'intérieur E kichen : à côté Eor m ioù : ancre E, er : dans à, dans le, au E oa : verbe être 3° pers sing imparfaits Gant : avec, ganin : avec moi Goulenn : demander Gwalenn, ur walenn f: une bague	Hag, ha : et Kas : envoyer Konesañs : connaissance Marc'had m où : marché Martolod m ed: matelôt Meilh ar veilh f : moulin Mont : aller Mouilhañ : mouiller Naoned : Nantes Nevez : nouvelle Pelec'h : où Servijourez f ed: servante Tri: trois Yaouank : jeune

Displegadenn verb kaout : Conjugaison du verbe avoir

Verb kaout	1° p s	2° p s	3° p s M	3° p s F	1 p pl	2 p pl	3 p pl
Amzer bremañ	Am eus,	ac'h eus	en deus	he deus	hon eus	hoc'h eus	o deus
Amzer dremenet	am boa	az poa	en doa	he doa	hor boa	ho poa	o doa